


CHANSON NEVEZ

Var sujet eur c'hloarec hac e Vestrez



VAR UN TON NEVE

Tad ar sperejou mad, a galon me o ped
Da rei din sclerijen da bosi va speret
Da ober eur chanson entre daou zen yaouanc
Ha da espliqua scler d'ar rea vo presant.

Quent evit ma commancin ober ar ganaouen,
Unan ane so mal, hac un all femelen,
Hac a deuyo souden a beb eil da barlant
An eil eus eguale, erve o santimant,

Elevet int o daou en eur memeus contre
En eur respecti rent gant guir fidelite ;
En eum geuillet int bet en o bugaleac'h.
Abaoue ma sevont e ront davantach.

Ho zud p'o deus goelet, a ra an disparti :
Ar goas a so casset, da boursuiv e studi ;
Setu int separat, ema o studia ;
Var ben daou vloa goude gret e studi ganta

Tri bloa varn-uguent de, recev a ran urziou ;
Bet è er seminer, belec sur e vez :
Setu ar femelen breman abandonet,
Mautiet è he c'halon, n'en de quet hep sujet.

Bep mintin pa save ha pa ze da gousquet
E teu da zonch dezi demeus he douç Cloarec,
En deus grêt e studi o c'hortos an termen
Da vea beleguet, mæs ne vo birviquen.

Monet a ra ar goas vel un den languissant
Ha blesset e galon da gaout e vestres coant,
Bete gout ne dije chanchet a preposou,
Ha rentet inutil an oll bromessaou.

Ar Goas

Bonjour d'ech, va mestres, trist yras è va chalon
O tonet o pete gant peb affliction :
Mar deuet d'am dilezel c'hui am grei languissant,
Ha mar bec'h fidel din e zeo fin d'am sourmant,

Ar Plac'h

E zon var an douar pemp bloa varn-uguent zo,
Hac e meus ententet cals eus a resoniou :
Dre m'oc'h eus studiot, e credan oc'h eus c'hoant
Da zonet d'am goapât, diuoallit, d'en yaouanc.

Ar Goas

Ne don quet deut aman da gonta fablennou,
Bezit ar vadeles da chelaout va c'homsoù
Ha parlantit ouzin, mar plich ganech' ingal,
Rac c'hui a meus choaset en plac va breurial.

VAR UN TON NEVE

Ar Plac'h

Biscoas un den honest na meus drouc respondet,
En em anaout a remp hac a reomb bepret :
Contant on da livra va c'horf ha va bue,
Ha goude va oll vad ar pez ameus ane.

Ar Goas

Roet emeus da entent ha d'am mam ha d'am zad
Ne vigent quet belec, na voa quet ze d'am grat,
E hen d'en eum angagi evit mont d'an arme,
Ha biquen n'am gouelgent o retorn en bue.

Ar Plac'h

Ar pez a lavarit so vel pa vent scrivet,
Mæs bremen e meus hast adare da glevet
Pe seurt responchou oc'h eus bet va mignon,
P'oc'h eu annoncet de eur goms quen direzon.

Ar Goas

Accordet e ze din ar pez meus goulennet :
Pa guerfe va mestres, e veomp unisset.
Laquit din un termen ha na vo quet re hir,
Ervez ho polonte, evel m'oc'h eus desir.

Ar Plac'h

Quer bras e va desir hac e ze oc'h hini :
Mæs na c'houlennen quet donnet da zeclari
Ar virione quent scler dirazoc'h, va mignon,
Rac aon na vent tromplet dre no tol trahison.

Ar Goas

Chenchomp a breposou da laqueomp termen
Da veza assamblet eb aetardi soudan
Dre volonté Doue hac hon mam an Ilis
Ma chenchomp a vuø ha fin d'on yaouanquis.

Ar Plac'h

Omp en anter ziun, hirio è ar mercher,
Am termen a laquan emei, va servicher ;
Tennit ho paperiou var an de diveza,
Ma veomp embannet, e mei, dissul guenta.

Setu an daou den-mâ ddmeet hac eureujet,
Da usa o bue vel m'o deus promettet [redacted]
Chanç a souetan dê entre ma vint er bed-mâ,
Ha goude ho maro ar gloar da jouissa.

Ar chanson a zo grêt gant eur speret dister.
Natif ha domicil a goste Landreguer :
Demeus a vis guenver, er bevar varnuguent,
Ebars er bla c'hoezec, evit reï da entent.

FIN

CHANSON NEVEZ

COMPOSET VOAR SUJET AR HAFFÉ

Var un ton ancien

Tostait oll tud yoanc da glevet eur chanson
Zo composet er blama gant sujet a reson
An everezet Cafe trac an eferrien guin
O deus gret quemen ma da laqat da horzin.

Ar guin zo eur liqueur zo formet gant Doue
Hac voa bet transplantet gant hon tad coz Noe
Non pas vel ar hafe zo un dro invantet
Gant eur vreg malicius eur ar vro an turquet.

Quenta ma teuas biscoas dar vroma ar hafe
Ne voa nemet an noblans guement a eve
Ha bréma an oll gomun a ya tout da eva
An darn voya anezo no deus quet a vara.

Brema me a ziselerio ebarz en abreje
Ar chanson ma composet var sujet ar hafe
Etre daou den demezet nem reprochai
Unan balamour dar guin hac un al dar hafe.

Ebars er blaves mil eiz cant pemzec a pevar
E savas fachiri goudai gouel a oll zent [uguen
Ar vreg a yeas en quer gant eur boezellat ed
Hac a foetas e arhant gant e homerezet.

Pa antreas er hafe e deus bet lavaret
Me gret evit on arhant e vezimp servichet
Digassit demp ni cafe hac ive odevi
Hac eur voufaillad liqueur vil nem regali.

Ar liqueur an odeur a savas en o fenn
Ma comansjont da zanaal o feder diarhen
Plah an hed a lavaras ma arhant zo foetett
Me a efe eur bane rac hoas em eus sehet.

An teir all lavaras neuzaï abouez o fen
Ret eo goelet ma homer peguement ar seoden
An hostises pa glévas dan eh zo pignet
Pa voe aranjet ar gont e chome hoas our scoet

An hostises a laras me meus roet da eva
Ac abars ma sortifot lui rance va fea
Rac-se en em aranjet da bea o scoden
Evidon me a bromet ne po quet a dermen.

Ar merhet en em selle hac o devoa poan ben
Rac no devoa queta arhant da bea o scoden
Jacqueta a laras me rey ma devancher
Ha te ma homer Jannet a rey da vouchouer.

Unan demeus an ezah en deveus bet cavet
He devoa foetet e vreg ar som a bevar scoet
Quittat a ras e labour evit donet en quer
Ebarz e ty ar hafé o havas o feder.

Hac evel ma hantreas en deveus lavaret
Ha ne heus tai qet a vez lavar greg debordet
Lezel eur buguel bian deomp ni da rusbuellas
An deirvet nos eo onman nem eus cousset berat

Aze ama em hichen ha ro peoh emezi
Quemer un tassat cafe da dremen da anui
Tao din gant da zour bervet avoalh e heus evet
Qenta bane a evi me gare vez crevet.

Evidont-te sah ar guin te vepris ar hafe
Ebarz en hostaliri e vez cavet noz de
An arhant a honeas etro pad ar zun
Ne neuz quet re ane da gavet guin a butun

Janicotem emezan brema ni ray ar bal
Goudai foetta ma danvez donet dam haquetal
Dre brontitud eur vasat a roas dar vreg ques
Ma tiscaras d'an doar cafe dien a les.

Ar merhet a laras o feder assemblees
Maquet oh eus ma mignon vont da squei o moes
Squilliet oh eus ar hafe hui a reng bea
Pe brema souden vatan ni ya do tisleva.

Ar peder blah animet a saillas varnezan
Hac an hostises ive evit e zivleva
Treinet voe dre an ti e zillat voe roquet
Hac e vreh betec e scoa gant ar hafe grillet.

Evel ma halas achap e commans redet
En eur sellet var e lerh evel eur has fouetet
Darbet ai din emezan cazi col ma bue
Me garfe e ve beuzet ar merhet er hafe

Etrezoh goaset yaonc dioualit o crague
Pa sint da verza aman na safen dar hafe
Ar hafe zo debohus dre ma za mad a dous
Hac a ro tentasion dan ol merhet lipous.

Dre ze oh avertissan ezah eus ar hontre
Ni qet de glasq ho crague ispcal dar hafe
Mar ho peus guers boutaillad barz ho codel
Querzit dan hotaliri da velet yan yourdel.

Pa ven en hostaliri gant ma hamaradet
Eur podat guin en hichen ve contant va speret
Arça eta mignonnet evomp peb a vanai
Ha canomp oll eur chanson var sujet ar hafe

Ar hafe ar ra domach ebarz en peb canton
A ma dê qer an aman ne dê qet beb rézon
An dien a ya ema peb guella eus ar les
Ha ni entrezomp goaset a sêbr or bara seh.

Ni peurvuya cancerien a vepris ar hafe
Ze zo eos ma reprenom a merhet a graque
Ar guin par er hemerer gant modération
A ro courach deur haner da gana eur chanson.

Poent e cavan finissan amplic em eus comset
Efif ar seurt a guerfet me ne sourcian qet
Efif guin efif cafe liqueur pe odevi
Mes dioualit absolu da gavet fachiri.

CHANSON YANIC FRIPON

Voar Ton : Je vous supplie Mesdemoiselles

Me zo pedet gant eur mignon
De vouloir bien raconter
Darn demez va zroyou fripon
De ma jeunesse passée.

Da guenta me am boa sonjet
Quand j'étais jeune garçon
Peroz etouez ar ganfardet
Que j'étais tout le Bonbon

Dar poent ze me a oa yaouanc
Je n'avais que dix-huit ans
A pa zanssen gant merc'het evant
On me donnait des rubans

Goude an danz certainament
Je voulais aussi fumer
Mez n'am boa ket temperamant
Et j'étais très ennuyé

Pa vijen bars en tachennou
Je fumais comme un dragon
Va daou zron ebars em bragou
Je me croyais le tonton

Eun tamou moustachou netra
J'avais aussi sous le nez
Eur chaden vont eus ar c'haera
Je portais à mon côté

Jamais canfard evel din-ma
On avait vu par ici
Guiskamanchou euz ar propa
Et un chapeau de bibi

Me valeai velt eur ponssin
Presque comme un officier
Calz a lare e oan pot fin
Et j'étais très enchanté

Eun devez e oan saludet
Je me trouvais honoré
Me a gred e oan kemeret
Pour le Mair' de la contré'

Me blije dar merc'het yaouanc
Et partout j'étais connu
Ac ouspen e oan eur c'hiant
Comm' vous n'avez jamais vu

Evelt eur piler patatez
Je racontais des discours
Ne gonte ker braou d'am mestres
Et ell' me croyait toujours

Pa nem gaven gant ar merc'het
Dans les foir' et les pardons
Bepred e comzen en galleg
L'air d'ignorer le breton

■ Gallec mad ouïen ket iveau
Je me trouvais très gêné
An draze credet zo diez
Quand on n'sait comment parler

Aroc kuitad an assamble
Je payais toujours à boire
Goude ze me e c'hunduai
Tout à fait jusqu'au manoir

Tont dar guear n'eurgonta cojou
Je l'embrassais quelques fois
Ober dei tamigou jestou
On m'aimait bien malgré ça

E ne zi pa ənem gaven
Aussitôt j'étais prié
Gant va mestrezik canfanten
Mon ami venez souper

Var an dol vije digasset
Du vin et de l'eau-de-vi'
Bara guiniz a viou fritet
Et bien d'autres chos' aussi...

Gant va mestrez vijen pedet
Mangez donc mon cher ami
Goude termad gand re govad
Mangez toujours je vous pri'

Neuze chenvel euz eun toussec
Il me fallait bien lever
Da guitad vijen oblijet
Quelques fois très embêté

Daoust ama blijen dar merc'he
Ecoutez-moi mes amis
Ve ret c'hoaz dibri patatez
Et souvent de la bouilli'

Aliez goude corvadou
Il faut souvent se priver
A goude ober calz troyou
Rester souvent sans trouver

Me meuz clasket me meuz cavet
Et si vous faites comm' moi
Ac oman m'ar bec'h refuset
Allez-donc jusqu'à là-bas

FIN

KLEMOU

Sur Plah Manket

VAR UN TON TRIST

Selaouit brema va moez va hamaradezet
Houi pere em yaoankis e meus bet cals caret
Eus a doulit ha ludu me ra deah va klemou
Deut oll assambles gani ka versea ha taelou

Me meus kolet brema ma reputation
Ma halon a zo karget ha zezolation
Dre ma meus kredet siouas la fos camaradou,
E meus collet ar haerra demeus va bouqejou,

Beteg vrema me hallai larea vouez buel,
E vohan kerra femeulen a oa en breiziel
A brema me zo hudur en toezi an ol verhet
Pa eo va haerra bouquet siouas gani collet

Henes oa karrea tenzor e oa barz er bedma
Ne gavin ket henep leah da brena sort deza
Dre veza deut da gredi camaradet traytour
meus lezet va bouquet da vonet gant an dour

Pa dean d'examina ar voul rond deus ar bed
Siouas me vel varnaizi brema calz a verhet
Pere zo kolet gantai coulz a me ho rozen
O veza deut da fiout en comzou treitourien.

Va oll gerent zo siouas gani dizinoret
Va chans zo dinatur va flaneden kalet
Va halon zo en irvout coulz en noz vel en de
Me a houlen ar maro vit disqen em be

Goudai va frajilitai me zo oll an keniet
E compren barz stad trist pihini on rentet
Beteg brema me meus bed douget kokardeno
Brema e meus eur bissar eur vas da vont e dro

Beteg an noad a ugrent vla me meurbet bevet
Ebarz en doujans Doue evel ma voa gleet
Neuzai me voa caret gant an oll em hantan
Neuzai camaradezet voa la oen va halon

Goudai ne meus betheulet kouls en nos a ende
Ar goel gompagnunez a voa barz em hontrai
Dre se me zo mepriset ebarz en breuzel
Va evrustet er bedma zo et gant an avel

Ne meus ket heuillet siouas avis fad na mam
Dre ze ne meus get galet beya ive divlam.
Groet e meus skouarn vouzar pa gleven anai
Koulkoudai deus bet laret ar virionais dimai

Lavaret zo bet dime gante sur aliez,
E heul goel gompagninez mije tristidigez
Mes dre ma oan yoanc veprisen ho homzou
A ze ra dime brema scuil eu mor a zaelou

Ma mije bet ho hredet keuliet ho gourhemen
Ma buez kamaradezet vije bet laoën
Mes pa meus qet sentet brema demeus ar stur
Allas vit deus ar garec e ranki ober zur

Noz a de he mon en neur stad trist meurbet
Avichou me un tam da zibri goechal ne ve ket
Goudai ma ve erh a scorn yen bras an avel
Keuneut na mo qet dober tan da doma ma bugel

Houi va hamaradezet goude va oll angen
Deuio hoas dam goapad gant eur galon laouen
Mes ma kemerit an hent pehini zo danger
Houi pezo eveldon da zougen eur beh poner

Allas kamaradezet daou hent zo er bedma
An hini gemer an hent mad neus da zougen beh
Nep a gemer an hini falbale voar va roujou [scan
Neu eun poner da zougen a kals a dourmanchou

Vit var ma choue brema zo eur beh poner
Hag a meus deus e zougen cals a boan a miser
Dalhet vezin den douguen beteg fin va deiou
Adieu dan yaouankis ha dam plijaduriou